


ESKOPTI KEMPER ha LEON



KENVREURIEZ
ar
BREZONEG

K A I E R I 9

° Peseurt Brezoneg a zo ganeom ?.....	58
° Sul genta ar Horaiz A.....	59
° Eil Sul ar Horaiz A.....	62
° Trede Sul ar Horaiz A.....	64
° Pevare Sul ar Horaiz A.....	69
° Pemped Sul ar Horaiz A.....	74
° Seizved Sul Ordinal A.....	78
° Eizved Sul Ordinal A.....	81
° Kantikou Nevez evid Amzer Fask.....	84
Gouel Sant Josef -19 meurzh.....	kaier I3:p.I17
Gouel Maria Veurz -25 meurzh.....	kaier I3:p.I22
Merher al Ludu.....	kaier I3:p.84
Sul ar Bleuniou hag ar Basion.....	kaier I4:p.I27
Sul Fask.....	kaier I4:p.I49

Troidigeziou aotreet,da arnod,evid an Eskopti,
 aberz an Aotrou F.BARBU,Eskob Kemper ha Leon.
 Kemper,d'ar 5 a viz c'hwevrer 1972.

+ Visant FAVE,eskob-skoazeller

Komanantit da Gaierou "KENVREURIEZ AR BREZONEG" (I5 lur)

Aotrou Job SEITE - 29 N Guissény - C.C.P. I738-66 RENNES

Ar re o defe hoant kaoud KAIEROU bet embannet abaoe ar penn kenta,o goulenn
 digand Job Seite, Skol an Aod - Gwiseni.

PESEURT BREZONEG A ZO GANEOM ?

N'eus nemed eur brezoneg hebken. Koulskoude, o veza ma n'eo ket bet kelennet ar brezoneg, er YEZ KOMZET, e kaver doarecu disheñvel da zistaga euz eur hornad-bro d'e-gile, troiou-lavar, eur gêr bennag ivez dre douez; buan awalh e teu ar skoñarn da voaza.

Tamm ha tamm, ez eus bet savet eur BREZONEG SKRIVET, unvan awalh evid Kerne, Leon ha Treger. Ar veleien o-deus kemeret eur perz braz e labour aoza ar brezoneg-se, hag a veze intentet en tri eskobti. Sonjit 'ta petra veze skrivet ha lennet gand ar bobl, e penn kenta ar hantved: katekizou, kantikou, Buez ar Zent, Lizeri Breuriez ar Feiz, Feiz ha Breiz, levriou-overenn ha levriou a gelemmadurez kristen. Lakom c'hoaz ar preze-gennou en iliz, diwezatah, embannaduriou Tadou Kapusin Rosko.

Ar veleien a glaske, da genta, beza intentet gand an dud vunud ha dizesk zoken; eur benveg a zarempredou hag a gelemmadurez e oa ar brezoneg evito ha klask a re-ent kempenn ar yez, evid ober anezi eur benveg ampartoh da zisplega mennoziou diñez pe ziñsoh da rei da intent. Eur bern gêriou a veze evel-se sanailhet gand an dud, gêriou ha ne implijent nemed ral a wech en o buez pemdezieg. Pa lavarer: "Ar gêr-se n'eo ket anavezet du-mañ.", taolom evez ! Gwelloc'h e vefe lavared: "Ar gêr-se n'eo ket implijet du-mañ." Ar brezoneg anavezet gand an dud n'eo ket ken treut hag a zonjfed !

Goude-ze, eo deuet an emzao lennegel, gand ar helaouennou braz evl GWALARN hag ar skrivagnerien a oa war o zro. Ar re-mañ o-doa lennerien desketoh ha kas a rajont ar yez skrivet war araog.

Ar brezoneg a zo ganeom n'eo brezoneg euz kornad pe gornad. N'eo ket brezoneg "du-mañ", med ar brezoneg skrivet unvan, bet savet en or raog. Euz or gwella a reon evid ma vo êz awalh da intent d'an oll.

Eur gêr bennag diñsoh a zeu ganeom awechou, med desket e vezint; n'hellom ket ober hebto. Pa vo desket ar brezoneg er skoliou hag a-hend-all, e vo êsoh deom skriva.

Eur yez a hell - hag a die -kreski ha gwellaad, evel ma kresk eur wezenn; sevel a ra d'ar wezenn skourrou nevez ha kreskennou war he gwriziu; mar deo dero ar wezenn, dero e vo ivez skourrou ha kreskennou. Gwella pezh 'zo e hell ar brezoneg kreski diwar e wriziu e-unan: gêriou nevez savet diwar ar hef koz a vez intentet dioustu gand an dud, ha goude ma n'o-defe o hlevet biskoaz; tro a vefe da rei eur bern skoueriou. Ha kemend all a hériou koz hag a zo en argoll pe gollet hag a vefe gellet rei buez dezo en-dro.

Eur wezenn a hell ivez dizeha hag eur yez a hell strisaad ha koll he sked, ma ne vez studiet ha ma ne vez ket labourer warni.

Diwar gelemm gand ar brezoneg, ema ivez or zonj labourad dorn-ha-dorn, kalon-ha-kalon gand kement hini a boagn evid rei buez ha lufr d'or yez hag astenn he levezon war ar Vro.

Kenvreuriez ar Brezoneg.
1972

LENNADENN GENTA. Abaoe ar penn kenta eus ar bed, an dud a zo taget gand ar pehed. Or buez deom a zo eur stourmad a eneb an droug. Med dre Jezuz Krist, ni on devezo an treah.

Lennadenn euz leor Penn kenta ar bed. (2/7-9, 3/1-7)

7. Neuze Doue a stumm korv eun den gand pri (poultrenn) an douar, a c'houez en e fronnellou eun aezenn a vuez, hag an den a zeu da veza eun dra veo.
8. Goudeze, Doue a gempenn eul liorz, e tu ar zao-heol, hag a lak ennañ an den e-eus krouet.
9. Doue a lak da ziwan euz an douar, gwez a beb seurt, kaer da weled, o tougenn frouez mad da zebri; e kreiz al liorz, edo gwezenn ar vuez hag ar wezenn a ro anaoudegez euz ar mad hag euz an droug.
1. An naer oa korvigell eta loen bet krouet gand Doue, war an douar.
Lavaret a ra d'ar vaouez:
- Evelse, Doue e-neus lavaret: "Ne zebroh ket euz oll wez al liorz?"
2. Ar vaouez a respont: d'an naer: "Debri a hellom euz frouez gwez al liorz.
Med euz frouez ar wezenn a zo e kreiz al liorz, Doue e-neus lavaret:
- Arabad deoh debri anezo, na touch outo, pe c'hwi a varvo."
4. An naer a lavar d'ar vaouez:
- N'eo ket gwir! Ne varvoh ket!
5. Med Doue a oar, en devez ma tebroh anezo, ho taoulagad a zigoro, hag e vezoh henvel ouz doueou, anaoudegez deoh euz ar mad hag euz an droug.
6. Ar vaouez a wel ar oa frouez ar wezenn mad da zebri, dudius da welet, mad da gaoud, pegwir e tigare ar spered.
Kutuill a ra frouez euz ar wezenn hag e tebr.
Rei a ra ivez d'hegwaz hag heman a zebr d'e dro.
7. Neuze o daoulagad dezo o daou a zigor hag e welont ez edont e-noaz.

SALM 50

(3-4, 5-6a, 12-13, 14, 17)

Diskan: (kantik n° 36) Pehet am eus, ha kalz pehet;
truez ouzin, Salver karet! (2wech)

3. Truez ouzin, va Doue, abalamour d'ho madelez;
en ho trugarez vraz, lamit va mankou en ho keñver.
4. Va gwalhit penn-da-benn euz an droug am eus grêt;
goude va fehed, grit ahanon glan adarre.
5. Ya, anzañ a ran oun bet manket en ho keñver;
nez deiz emañ va fehed dirazon.
6. Eneb deoh, ha deoh hebken, am eus pehet,
truez a zo fall dirazoh am eus grêt.
12. Krouit ennon, va Doue, eur galon hlan,
d'ar pehenti em hreiz eur volontez stard.
13. Mirit va dehfen mui pell diouzoh,
ha na dennit ket diganin ho spered a zantelez.
14. Rentit din ar joa da veza salvet ganeoh,
roit din kalon vad d'am harpa nerzuz.
17. Aotrou Doue, digorit din va muzellou,
ma savin va mouez evid ho meuli.

EIL LENNADENN. Barnet om d'ar maro; arabad deom serri on daoulagad. Arabad deom kenneubeud koll nerz kalon. Ar ger diweza a jomo gand gras Doue.

Lennadenn euz lizer an abostol Sant Paol d'ar Romaned. (5/I2-I9)

- I2. Dre un den hebken, Adam, eo deuet ar pehed er bed, ha dre ar pehed, ar maro; evelse ar maro e-neus taget an oll dud, dre m'o deus oll pehet.
- I3. Araog Lezenn Moizez, ar pehed a oa dija er bed.
A dra zur, lavaret e vez, ar pehed ne hell ket beza rebechet, pa ne vez lezenn ebet, ha koulskoude, azaleg Adam betek Moizez, ar maro e-neus graet reuz, zoken war ar re n'o doa ket pehet,
o tizenti, evel Adam, en hag a oa ar skeudenn euz an hini a dlee dond.
- I4. Kemm a zo etre donezon gras Doue ha levezon ar pehed.
Rag m'e-neus ar maro skoet an oll dud dre behed unan hebken, gras Doue he deus kalz muioh karget an oll dud; eur hras eo roet en eun den hebken: Jezuz Krist.
- I6. Etre donezon Doue ha pehed unan hebken ez eus kemm.
Dre behed unan hebken e vezer barnet ha kondaonet, med dre hras Doue, e vez ar pardon euz eun niver braz a behejou.
- I7. Dre-ze, evel m'eo deuet dre unan hebken, dre faot unan hebken, ar maro da ren, e teuo, muioh c'hoaz, ar re a reseo puill donezon gras Doue, da ren dre unan hebken, dre Jezuz Krist.
- I8. Setu eta, evel m'eo bet kondaonet an oll dre faot unan hebken, evelse ivez ar justiz gounezet gand unan hebken a zigas d'an oll eur justiz a ro buez.
- I9. Evel m'eo deuet an oll da veza peherien dre zizentidigez unan hebken, evelse ivez an oll a vo santelleet dre zentidigez unan hebken.

SALUD D'AVIEL

Da Gomz Aotrou Doue a zo gwirionez
ha da Lezenn, eun dizamm evidom.
N'eo ket gand bara hebken,
e vez maget an den,
med gand peb ger ivez
lavaret gand Doue.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (4/I-II)

1. Neuze ar Spered Santel a gas Jezuz d'ar goueleh, evid beza tentet gand an droug-spered.
2. Epad daou ugent dervez ha daou ugent nozvez e chom war yun.
3. Ha pa deu naon dezan, e tosta outan an toueller:
- Mar dout Mab Doue, emezan, gra d'ar vein-man tre e bara.
4. Jezuz a respont:
- Skrivet eo, n'eo ket gand bara hebken e vez maget an den, med gand peb ger deuet euz genou Doue.
5. An droug spered a gas anezan goudeze d'ar gêr zantel (Jeruzalem), hag a zav anezan war lein uheila an templ.
6. - Mar dout Mab Doue, en em daol d'an traon, rag skrivet eo:
- Doue a roio ursiou d'e êlez evidout.
Da zougen a raint en o daouarn, gand aon na stokfe da droad ouz ar vein.
7. - Skrivet eo ivez, eme Jezuz, ne denti ket an Aotrou, da Zoue.
8. An droug spered a gas anezan c'hoaz war eur menez uhel-uhel.
Diskouez a ra dezan oll rouanteleziou an douar gand o oll vadou.
9. - Kement-se oll, emezan, a roin dit, ma kouezes eharz va zreid evid va adori.
Jezuz a respont dezan neuze:
10. - Kerz kuit, Satan, rag skrivet eo:

- An Aotrou ,da Zoue a adori,dezañ hebken doujañs a renti.
 II. An droug spered a lez neuze Jezuz hag e tosta outañ êlez,
 evid e zervija.

PEDENN AN DIGOR

Roit deom ar hras,Doue oll-halloudeg:
 en eur heulia pedennou hag oberou santel ar Horaiz,
 ra zeuim da gompren gwelloc'h Mister braz
 ar zilvidigez dre Jezuz Krist,
 ha da labourad evid ar zilvidigez-se,en eur veva direbech.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll viskoaz da virviken.

WAR PROVOU

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,lakad ahanom e stad vad,
 evid kinnig ar zakrifis-mañ,
 da zigeri amzer zantel ar Horaiz.
 Dre Jezuz Krist Or Zalver.

PREFAS

.....dre Jezuz Krist,Or Zalver.
 Pa 'z eo chomet daou-ugent dervez heb debri,
 e-neus-eñ roet ar skouer genta eus Koraiz ar gristenien;
 hag,en eur ziarbenn ardou an droug-spered,
 e-neus desket deom trehi war an techou fall,
 evid ma hellim,o lida euz or gwella mister braz Pask Or Zalver,
 beza prest da dreiza,da finor buez,
 beteg Pask peurbaduz ar baradoz.
 Setu perag....

GOUDE AR GOMUNION

Resevet ganeom ar bara euz an Neñv,
 a vez maget gantañ ar Feiz,starteet an esperañs,
 ha roet nerz d'ar garantez,
 ni ho ped,Aotrou Doue:grit ma teskim kaoud naon euz Or Zalver,
 ar BaraBeo ha Gwirion,
 hag en em vaga diwar gement komz lavaret deom ganeoh.
 Dre Jezuz KRist, or Zalver.

LENNADENN GENTA. Abraham ne jom ket da nehi; fizianz e-neus e Komzou Doue hag ez a en hent. N'eus nemed an hini e-neus fizianz e Doue hag a hell trei kein d'an amzer dremenet ha riskla eun dra bennag.

LENNADENN EUZ LEVR PENN KENTA AR BED

(I2-I-4a)

1. Doue a lavar da Abraham:
- Kerz kuit euz da vro, lez war da lerh da familh,
ti da dad, evid mond d'ar vro a ziskouezin dit.
2. Me a raio ahanout eur vroas vraz a dud,
a vennigo ahanout, a zavo uhel da ano,
dreizan e tiskenno war an douar bennoz an Neñv.
3. Me a vennigo an neb d'a vennigo,
med va malloz a gouezo war gement hini a zisprijo ahanout;
ennout e vo benniget oll familhou an douar.
4. Hag Abraham en em lak en hent evel m'e-noa Doue kemennet dezan.

SALM 32

4-5, I8-I9, 20-21

Diskan: (gwerzad 22) Ho trugarez warnom, Aotrou (Doue),
evel m'on eus-ni fizians ennoh.

4. An Aotrou Doue 'zo leal a lavar,
en e oll oberou eo fidel d'e hêr (pe d'e bromesa)
5. Plijoud a ra dezañ beza reiz ha just,
gand madelez an Aotrou eo leun an douar a-bez.
18. An Aotrou a bar e lagad warn an dud a zouj anezañ,
war an dud a esper en e vadelez,
19. evid savetei o buez euz an Ankou, ha rei bevans dezo pa vez naonegez.
20. Emañ on ene leun a fizians en Aotrou:
or skoazell hag on divenn eo.
21. Ennañ e kav or halon al levenez;
en e ano santel, on eus fizians bepred.

EIL LENNADENN: Doue e-noa galvet Abraham, gervel a ra peb hini ahanom.

Red eo deom riskla or buez, evid an Aviel, dre fizians e Jezuz Krist,
or savo a varo da veo.

LENNADENN EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DIMCTE. I/8b-10

- 8b. Mab karet, skoazellet gand Doue, kemer ganen, da lod a boaniou evid an Aviel.
9. Doue e-neus or saveteet, ha roet deom da glevet e halvadenn zantel;
nann abalamour d'on oberou deom-ni,
med kentoh dre ma felle dezan kement-se,
ha dre e hraz, ar hraz-se bet roet deom a oll viskoaz e Jezuz Krist,
10. hag a zo breman diskouezet deom, dre zonedigez or Zalver Jezuz-Krist,
e-neus distrujet ar maro ha lakeet da skedi ar vuez
a bado da viken, dre an Aviel.

SALUD D'AN AVIEL

(ton: Gloar da Vari...)

Gloar d'Or Zalver, e peb amzer !
Morse burzud ken laouen !

Jezuz Maro ha Beo ivez,
Maro, med beo da viken !

Eur vouez e kreiz ar goabrenn a lavar:

- Heman eo va mab muia-karet;

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (7/I-9)

1. C'hweh dervez diwezatoh, Jezuz a gemer gantañ Per, Jakez ha Yann e vreur,
hag a ya ganto en eul leh distro war lein eur menez uhel.
2. Neuze, dirag o daoulagad, Jezuz a jench doare;
dond a ra da veza lugernuz, evel an heol,
e zillad da veza gwenn-kann evel ar sklerijenn.
3. Moizez hag Eliaz a bar dirazo, o komz gantañ.
4. Per neuze a lavar:
- Aotrou, kaer eo deom beza aman;
ma kares, me a zo o vond da zevel amañ teir deltenn,
unan evidou, eun all evid Moizez, hag eben evid Eliaz.
5. Edo c'hoaz o komz, pa zeu ur goabrenn lugernuz d'o gelei,
hag euz kreiz ar goabrenn, e teu eur vouez:
- Heman, emezi, eo va mab muia karet,
ennañ em eus lakeet va dudi; selaouit anezan !
6. O klevout kement-se, an diskibien a gemer aon
hag a gouez d'an douar.
7. Jezuz a dosta, hag o touch outo:
- Savit en ho sav, emezan, na dit ket da gaoud aon !
8. Sevel a reond o daoulagad, ne welont mui nemed Jezuz, e-unan edo.
9. En ur ziskenn diwar ar menez, Jezuz a lavar dezo:
- Na gomzit da zen euz ar pezh ho peus gwelet,
araog ma vo savet Mab an Den a douez ar re varo.

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, ho peus gourhemennet deom selaou ho Mab Karet,
ho pet ar vadelez da vaga on eneo gand ho Komz,
evid ma vo sklêrreet sellou or spered,
ha ma hellim, e-kreiz al levenez,
gweled splannder ho kloar.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talvezo ar zakrifis-mañ,
da walhi or pehejou ha da zantellaad korv hag ené ho tud fidel,
evid ma vint e stad vad da lida goueliou ar Pask.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

PREFAS

.....dre Jezuz Krist, Or Zalver.
Goude beza, en araog, diskleriet doare e varo d'e ziskibien,
e-neus Jezuz, war ar mene z santel, diskouezet dezo splannder e hloar,
evid rei da intent, harpet war desteni Moizez hag ar Brofeded,
ez eo, dre boaniou ar Basion, e tleer mond da hloar an Adsao d'ar Vuez.

GOUDE AR GOMUNION: Aotrou Doue, en ur reseo er Zakramant, Or Zalver Beo da viken en
e hloar, ez eus mall ganeom d'ho trugarekaad, evid ar vadelez ho peus, p'emaom c'hoaz,
er bed-mañ, da rei deom perz e madou ar baradoz. Dre J.K. Or Zalver.

LENNADENN GENTA: Gwasket gand ar sehed, goude kalz trubuilhou all, Pobl Israel a gav d'ezi eo dilezet gand Doue. Evid diskouez e kendalh Doue d'he zikour, e ra Moizez eur burzud.

LENNADENN EUZ LEVR AN EXOD

17/3-7

3. En deizioù-se, emañ Pobl Israel o tarza, gand ar zehed, dre ziouer a zour, hag an dud a glask trouz ouz Moizez, o lavared dezañ:
 - Perag ho peus grêt deom kuitaad Bro-Ejipt, evid ober deom mervel gand ar zehed, ni hag or bugale, hag on loened ?
4. Moizez a zav kreñv e vouez warzu Doue:
 - Petra 'rin ev id ar bobl-mañ ? Dare int d'am laza a daoliou mein.
5. An Aotrou a respont da Voizez :
 - Tremen dirag ar bobl, kemer ganit lod euz tud koz Israel, lak en da zorn ar vaz a oa ganit evid skei gant ar ster, en Ejipt, ha kerz war raog !
6. Me 'vo du-ze, dirazout, a-zioh ar roh e Menez Horeb; te a skoio gand ar roh, hag e strinko dour anezi, d'ar bobl da eva. Evelse, penn-da-benn e-neus grêt Moizez, dirag tud koz Israel.
7. Hag e -neus anvet al leh-se Massa (=amprouadenn) ha Meriba (=tabud), ablamour m'o doa tud Israel klasket trouz outañ, hag amprouet an Aotrou, pa lavarent:
 - Daoust hag emañ an Aotrou ganeom, pe n'emañ ket ?

SALM 94

I, 2, 6-7, 8-9

Diskan: Hirio, na serrit ket dor ho kalon, selaouit mouez an Aotrou Doue !

pe: Un Doue a zeu d'ho kervel... (kantikoù N° 21)

1. Deom 'ta ! kanom laouen en enor d'an Aotrou Doue; a vouez uhel, meulom Doue, roh ar zilvidigez.
2. Tostecom outañ e-kreiz ar veuleudi; kanom dezañ salmou ha kantikou.
6. Deuit tre, stouom beteg an douar, daoulinom dirag an Aotrou, or Hrouer;
7. Rag on Doue eo, ha ni ar bobl renet gand e zorn.
8. Hirion eo poent deoh selaou e vouez, na zerrit ket outañ dor ho kalon, evel gwechall er goueleh,
9. en deiz m'o doa ho tadou laket droug da vond ennon, o klask va amproui, ha goude ma welent kement a reen evito.

EIL LENNADENN: Beb an amzer, e kouez trubuilhou warnom. Arabad deom fallgaloni ha koll fizians e Doue evid-se. Poaniou Or Zalver, epad e Basion a zo kaera testen euz e garantez divent evidom.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM. (5/1-2, 5-8)

1. Va breudeur,
pa 'z om gwalhet euz or pehejou,dre ar feiz,
emaom e peoh gand Doue,dre Jezuz Krist,on Aotrou.
2. Drezañ eo ez om bet,gand ar feiz,digaset d'ar stad a hras m'emaom ennañ,
hag e trid or halon gand an esperans da dizoud gloar Doue.
5. An esperañs ne hellom ket beza touellet ganti,
ablamour m'eo diskennet karantez Doue en or halonou,
dre ar Spered Santel a zo bet roet deom.
6. Soñjit 'ta:ar Zalver,pa oam c'hoaz klañv gand ar pehed,
a zo deuet d'ar mare merket da rei e vuez evid ar beherien.
7. A-veh e vefe kavet eun dën da rei e vuez evid unan dibeh;
marteze,d'ar muia,evid eur madoberour e rofe eun dën e vuez.
8. Ha setu ar merk sklêr a ro Doue euz e garantez en or heñver:
pa oam c'hoaz peherien,e-neus ar Zalver roet e vuez evidom.

SALUD D'AN AVIEL

Diskan: Meuleudi deoh,Aotrou Krist !
Meuleudi deoh,Furnez Peurbadel an Doue Beo !
C'hwi eo gwir Salver ar Bed;
roit din euz an dour beo da eva,
ha biken mui n'em-mo sehed.

PENNAD EUZ AN AVIEL HERVEZ SANT YANN. (4/4-42)

4. En amzer-se,Jezuz a guita Bro-Judea,evid distrei da Vro-Halilea;
a-dreuz Bro-Zamaria emañ e hent.
5. Digouezoud a ra en eur gêr euz Bro-Zamaria,anvet Sikar,
demdost d'an douaroù bet roet gant Yakob da Jozef,e vab;
puñs Jakob a oa eno.
6. Eet skuiz gand an hent,Jezuz a ya d'azeza war bord ar puñs;
wardro kreisteiz eo.
7. Dond a ra eur vaouez,euz tud Bro-Zamaria,da gerhad dour;
Jezuz a lavar dezi:
- Roit din da eva.
8. Rag e ziskibien a zo eet e kêr da brena boued.
9. Ar Zamaritanez a lavar dezañ:
- Penaoz ! c'hwi eur Juzeo,a houlenn da eva diganin-me eur Zamaritanez ?
Ne vez ket a zarempred etre ar Juzevien ha tud Bro-Zamaria.
10. Jezuz a respont dezi:
- Ma anavezfeh donezon Doue,
ha ma ouifeh piou 'zo o lavared deoh:Roit din da eva,
c'hwi eo,moarvad,a houlennfe digantañ,
hag eñ a rofe deoh dour beo.
- II. Ar vaouez a lavar dezañ:
- Aotrou,nho peus netra evid tenna dour,
hag ar puñs a zo don;
eus pelh 'ta ho peus an dour beo-se ?
12. Ha brasoh e vefeh-c'hwi eged on tad Jakob,
e-neus roet deom ar puñs-mañ
hag e-neus bet evet dioutañ,
eñ hag e vugale hag e loened ?
13. Jezuz a respont dezi:
- An neb a ev euz an dour 'zo amañ,e-no sehed c'hoaz;
med an neb a evo euz an dour a roin-me dezañ,

- n'e-no sehed mui da viken;
14. AN dour a roin dezañ a zeuio da veza ennañ eur vammenn,
hag a darzo an dourn anezi,
evid ar vuhez peurbaduz.
15. Ar vaouez a lavar dezañ:
- Aotrou, roit din euz an dour-se da eva,
ma n'am-mo ket sehed mui,
ha n'am-mo ket da zond amañ da denna dour.
16. Jezuz a lavar dezi:
- It da hervel ho kwaz,
ha deuit en-dro.
17. Ar vaouez da respont:
- N'am eus pried ebet .
- Gwir a lavarit, eme Jezuz, n'ho peus pried ebed;
rag pemp gwaz ho peus bet, hag an hini 'zo ganeoh bremañ
n'eo ket ho kwaz;
aze ho peus lavaret ar wirionez.
19. Ar vaouez a lavar dezañ:
- Aotrou, gweled a ran ez oh eur profed.
Ou tadou o deus adoret Doue war ar menez-mañ,
20. ha c'hwi 'lavar eo da Jeruzalem e tleer mond da adori.
21. Jezuz a lavar dezi:
- Kredit ahanon, maouez:
dond a ra an eur, ha ne vo nag er menez-mañ,
nag e Jeruzalem, ho po da adori an Tad.
22. C'hwi 'ador ar pezh n'anavezit ket, ha ni ar pezh a anavezom;
rag euz ar Juzevien e teu ar zilvidigez.
23. Med dond a ra an eur - ha bremañ eo - ma vo an dud a wir relijion,
oh adori an Tad e spered hag e gwirionez;
ar seurd tud-se eo a glask an Tad d'e adori.
24. Spered eo Doue, hag an dud a fell dezo e adori
a dle hen ober e spered hag e gwirionez.
25. Ar vaouez a lavar dezañ:
- Gouzoud a ran ez eus eur Mesiaz da zond,
an hini a reer ar Zalver anezañ;
hennet, pa vo deut, a zesko deom peb tra.
26. - Me eo, eme Jezuz, me hag a gomz ganeoh .
27. Ha kerkent e tigouez e ziskibien.
Souezet int, ablamour m'emañ o komz gand eur vaouez.
Koulskoude, hini ebed ne lavar dezañ:
- Petra emaoñ o klask ?
Pe - Perag emaoñ o komz ganti ?
28. Ar vaouez, neuze, a lez aze he fod-dour;
mond a ra e kêr, da lavared d'an dud:
29. - Deuit da weled eun den hag e-neus lavaret din
kement am eus grêt.
Daoust ha n'eo ket eñ ar Zalver ?
30. Hag an dud da zond er-mêz euz kêr, da gaoud Jezuz.
31. Etretant, an diskibien a bed Jezuz:
- Mestr, emezo, deuit da zebri.
32. Hag eñ da respont:
- Me 'm eus da zebri eur bevans ha n'anavezit ket.
33. An diskibien a houlemm kenetrezo:
- HA bet e vefe unan bennag o tigas dezañ da zebri ?

34. Jezuz a lavar dezo:
 - Setu amañ va bevans: ober bolontez an hini
 e-neus va digaset er bed, ha kas da benn e labour.
35. Ha ne lavarit-hu ket: Pevar miz c'hoazh, hag emañ an eost ?
 Setu e lavaran deoh: Savit ho taoulagad, ha gwelit ar mêziou,
 penaoz int gwenn dija evid an eost.
36. An eoster e-neus e hobr da gaoud,
 hag a zastum frouez evid ar vuez peurbaduz,
 e seurd ma 'z eo laouen koulz an hader hag an eoster.
37. Amañ e teu da wir ar pezh a vez lavaret:
 "Unan a had, eun all a ra an eost."
38. Me am eus ho kaset-c'hwi da eosti
 ar pezh n'ho peus ket bet labour gantañ;
 re all o deus labouret, ha c'hwi a zeu da zastum frouez o labour.
39. Euz ar gêr-se, kalz a Zamaritaned a zo deuet dezo feiz e Jezuz,
 ablamour da gomzou ar vaouez, a roe an d'steni-mañ:
 - Diskleriet e-neus din kement am eus grêt.
40. Rag-se, eur wech erruet beteg ennañ,
 ar Zamaritaned-se a bed anezañ da jom ganto.
 Ha chom a ra eno daou zevez.
41. Kalz stankoh e teuont neuze da g-redi ennañ,
 ablamour d'e gomzou e-unan.
42. Hag e lavaront d'ar vaouez:
 - N'eo ket mui diwar ho lavarou-c'hwi e kredom,
 rag ni hon-unan on eus klevet bremañ,
 ha gouzoud a reom ez eo hennez, e gwirionez, Salver ar bed.

LENNADENN DIVERRET: 5-13 / 1526 / 39-42

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, Tad pep trugarez ha peb madelez,
 c'hwi ho peus desket deom kaoud ar pare euz or pehejou,
 dre ar binijenn, ar bedenn hag an oberou a garantez;
 taolit ho sellou warnom,
 pa govesaom ouzoh, a galonizel:
 neuze, tra ma ra deom or houstians stoui d'an douar gand keuz,
 e vezim divehiet ha savet eno or sav, dre ho trugarez.
 Dre Or Zalver Jezuz krist, Ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Dre ar Sakrifiz-mañ, Aotrou, plijet gand ho madelez,
 ma vo ennom gwir volontez da bardoni o mankou d'or breudeur,
 pegwir e pedom evid kaoud ar pardon euz or pehejou on-unan.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

PREFAS

A/ Hini ar Horaiz da sul, gw. Levr-Overenn aoter, p.44

B/ E gwirionez..... Doue Oll-halloudeg ha peurbadel.
 Evid mad ho pugale,

DA RENTA DEZO glanded ha santelez an ene,
 c'hwi h peus grêt dibaba an amzer-mañ dreist ar re all,
 evid distaga o halon diouzh peb c'hoantegez direiz,
 ha gouzoud penaoz pledi gant traou tremenuz ar bed-mañ,
 eur zelher muioh c'hoaz d'an traou na dremenont ket .
 Setu perag....

C/ Ma 'z eo bet lennet Aviel ar Zamaritanez:

E gwirionez.....dre Jezuz Krist,Or Zalver.
 Eñ,pa houlenne dour da eva digand ar Zamaritanez,
 e-noa dija silet enni donezon ar Feiz,
 hag a zo plijet gantañ kaoud sehed euz feiz ar vaouez-se,
 evid enaoui,en he halon,tan ar garantez divin.
 Rag-se e teuom,ni ivez,d'ho trugrekaad,
 ha gand an Iliz,e kanom hoh oberou kaer,
 en eur lavared:

GOUDE AR GOMUNION

Resevet on eus,Aotrou Doue,an arrez
 euz madou kuzet ar baradoz,
 ha ,p'emaom c'hoaz war an douar,eo bet torret deom hon naon,
 gand ar bara euz an Neñv;
 ho pedi a reom eta, a greiz kalon,
 ma teuio da wir en or buez,
 kement a zo grêt ennom,
 dre vertuz an Overenn.
 Dre Jezuz Krist,Or Zalver.

LENNADENN GENTA: David sakret roue, eun dra a bouez e istor ar Zilvidigez.
Jezuz, Mab da Zoue, mab da Zavid, a ziskouez, o rei ar pare d'an den
dall ez eo Doue. Or harga a ra a sklerijenn, evid ma vevim, evel
bugale a sklerijenn.

LENNADENN EUZ LEVR SAMUEL.

I6/Ib, 6-7, IO-I3a

Ib. Doue a lavar da Samuel:

- Kemer da gornedad eol, ha kerz en hent;
da gas a ran da Vetleem, da di Jesse,
rag kavet em eus eur roue e-touez e vibien.

6. Pa zigouez Samuel, e ti Jesse, re goz ar bobl d'e heul,
e wel Eliab, unan euz bugale Jesse,
nag e lavar ennañ e-unan:

- A dra zur ema dirag Doue an hini e-neus dibabet,
evid beza sakret da roue.

7. Med Doue a lavar da Samuel:

- Na daol evez ebet ouz ar gwel anezañ,
nag ouz ar mentet braz ma'z eo, rag n'eo ket eñ am eus dibabet.
Menoziou Doue n'int ket menoziou an dud:
an den a zell ouz an doare,
Doue a zell ouz ar galon.

IO. Jesse a ra evelse d'e zeiz vab dond dirag Samuel.

Samuel a lavar:

- N'eo ket hini ebet euz ar re-ze, e-meus dibabet Doue.

II. Hag e houlen digand Jesse:

- N'az peus mab all ebet ?

Hag heman a respont:

- Chom a ra c'hoaz ar yaouanka, a zo o tiwall al loened.

Neuze Samuel a lavar da Jesse:

- Gra dezañ mond, rag n'e zeim ket ouz taol,
araog ma vo degouezet.

I2. Jesse a lak mond d'e gerhed.

Ar paotr a oa rouz (brun), daoulagad brao dezañ, eun den kaer.

Doue a lavar:

- Hennez eo, sakr anezañ e kreiz e vreudeur.
Azaleg an deiz-se, Spered Doue a ziskenn war David hag a jom gantañ.

SALM 22

I-3a, 2bc-4, 5, 6

Diskan:

Doue eo va Fastor,
ne vanko din netra;
rag war ar peuri druz,
am has da ziskuiza.

gwelout: Breiz a gan N°3 p.36-s.13

1. An Aotrou eo va fastor, n'am eus diouer a netra.

2. War ar prajou geot tener, e ra din gourvez;
daved doureier an diskuiz e kas ahanon,

3a. Ha nerz fresk a ro d'am ene.

3b. Va heñcha 'a dre ar gwennojennoù surra, evid enor e ano.

4. Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,
n'am eus aon rag droug ebet, rag c'hwi 'zo ganin.
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.

5. Evidon e lakit an daol,dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir (pe: va skudell) a zo leunn-barr.
6. Eürusted,gand ho madelez,a vo va lod,bemdez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou,epad hir amzer.

EIL LENNADENN : Sav a douez ar re varo !
An Aotrou Krist,Sklerijenn,warnout a skedo !

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER EFEZ 5/8-14

8. Va breudeur,gwechall,n'oa ahanoh nemed tenvalijenn,
bremen,en Aotrou,ez oh deuet da veza sklerijenn.
Bevit evel bugale a sklerijenn.
9. Ar sklerijenn a zeu diwarni kement a zo mad,santel ha gwirion.
10. Deskit anaoud ar pezh a blij da Zoue.
11. Na gemerit perzh ebet e oberou didalvez an denvalijenn,
o diskuillit kentoh.
12. An traou a ra an dud-se e kuz,mez a vez komz anezo,
13. med pa vezont dizoloet e vez gwelet.
ablamour d'ar sklerijenn,
ar pezh ma 'z int e gwirionez.
14. Kement a weler evelse,a deu da veza sklerijenn:
Setu perag e vez lavaret:
- Sav euz da gousk,te hag a zo kousket !
Sav a douez ar re varo !
An Aotrou Krist,Sklerijenn,warnout a skedo !

SALUD D'AN AVIEL

GLOAR ha meuleudi deoh,Aotrou Krist !
Me eo Sklerijenn ar BED !

An neñ a deuy d'am heul
en devezo sklerijenn ar vuez...eme an Aotrou.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN. 9/1-41

1. Jezuz,en eur zond er-mêz euz Templ Jeruzalem,
a wel,war e hent,eyn den ganet dall.
2. E ziskibien a houlenn digantañ outañ:
- Rabbi (da lavared eo:Mestr),
pehed piou a zo kaoz,m'eo bet ganet dall an den-mañ ?
3. Jezuz da respont:
- Nag eñ,nag e dud n'o deus pehet;
c'hoarvezet eo an dra-ze,evid ma vo diskouezet
oberou Doue a-wel d'an oll.
4. Red eo deom seveni oberou an hini e-neus va digaset,
keit ha ma 'z eo deiz;
emañ an noz o tond,pa ne hell den ebed labourad.
Keit ha m'emaon er bed,ez oun sklerijenn ar bed.

6. Goude ar homzou-se, e ra eun taol kranch d'an douar,
e ra eun tammig pri war daoulagad an dén
gand e granch, hag e led ar pri war daoulagad an dén;
7. Lavared a ra dezañ:
- Kê bremañ da walhi da zaoulagad,
da Lenn Siloë (ar gêr-se a dalv da lavared:kannad).
Mond a ra eta d'en em walhi, ha pa zeu en-dro, e wel sklêr.
8. E amezeien hag an dud a oa boazet d'e weled araog,
rag bez ' e veze o houlenenn aluzenn, a lavar neuze:
- Daoust ha n'eo ket hemañ a veze azezet o houlenenn aluzenn ?
9. Lod a lavar:
- Eñ eo ! ha re all: N'eo ket !
med eun all hag a denn dezañ.
10. Eñ avat, a lavar:
- Me eo !
11. Hag e houlenner outañ:
- Penaoz eo bet digoret dit da zaoulagad ?
- Respont a ra:
- An dén a anver Jezuz e-neus grêt pri,
ha ledet anezañ war va daoulagad;
goudeze, e-neus lavaret din: Kê da lenn Siloë d'en em walhi.
Aet oun eta, en em walhet am eus ha gwelet am eus sklêr.
12. Neuze e lavaront dezañ:
- E peleh emañ an den-se ?
- N'ouzon ket ! emezañ.
13. Kas a reer neuze d'ar Farizianed an hini 'oa bet dall.
14. Bez 'e oa deiz ar zabad, p'e n'oa Jezuz grêt pri
ha digoret dezañ e zaoulagad.
15. D'o zro, setu ar Farizianed o houlenenn digantañ
penaoz eo deut ar gweled dezañ.
- Respont a ra dezo:
- Laket e-neus pri din war va daoulagad,
eet oun d'en em walhi, ha bremañ e welan.
16. Lod euz ar Farizianed a lavar:
- N'eo ket an den-se a-berz Doue,
pegwir ne zent ket ouzh lezenn ar zabad.
- Lod all er c'hontrol:
- Penaoz e hellfe eur peher ober seurd burzudou ?
- Disparti a oa etrezo eta.
17. Trei a reont neuze da gomz ouz an hini dall, eur wech c'hoaz:
- Ha te, petra lavarez euz an den-se, pa 'neus digoret dit da zaoulagad ?
- Ur profed eo ! , emezañ.
18. Ar Juzevien, evelato, a gav diêz kredi ez eo bet dall an den-se
hag e-neus kavet ar gweled, ken na vo galvet e dud da zond dirazo.
19. Goulenenn a reont outo:
- Ha bez ' eo hemañ ho mab, a lavarit e oa ganet dall ?
Penaoz neuze e wel sklêr bremañ ?
20. Respont a ra e dud:
- Gouzoud a reom eo hemañ or mab,
hag e oa ganet dall;
med penaoz eo deut da weled sklêr bremañ, n'ouzon ket,
21. ha piou e-neus digoret dezañ e zaoulagad, n'ouzon ket muioh..
Goulennit digantañ e-unan, oad awalh e-neus,
dezañ eo da respont evitañ e-unan.

22. Evelse e komz e dud, ablamour m'o deus aon rag ar Juzevien,
pegwir eo bet dija divizet gand an Juzevien etrezo
taoler er-mêz euz ar zinagog
kement hini a anavezfe Jezuz da veza ar Mesiaz.
23. Ablamour da -ze, o deus lavaret e dud:
- Oad awalh e-neus, goulennit digantañ e-unan.
24. Evid an eil gwech, Ar Farizianed a halv dirazo
an dên a zo bet dall, hag e lavaront dezañ:
- Ro gloar da Zoue !
Ni 'oar, ni, ez eo an den-se eur peher.
25. Respont a ra egile:
- Hag-eñ eo ur peher, n'ouzon ket;
eun dra hebkên: dall e oan, bremañ e welan sklêr.
26. Lavared a reont dezañ c'hoaz:
- Petra 'neus grêt dit ?
Penaos e-neus digoret dit da zaoulagad ?
27. Hag eñ da respont:
- Lavaret am eus deoh dija,
ha n'ho peus ket selaouet;
perag e fell deoh klevoud eur wech c'hoaz ?
Ha c'hoant ho peus, c'hwi ivez, da veza diskibien dezañ ?
28. En taol-mañ, e tistagont outañ gwall gomzou, hag e lavaront:
- Te eo a zo dskibl dezañ;
med ni, da Voizez eo om diskibien;
29. da Voizez e ouzom-ni e-neus Doue komzet;
hemañ, avad, n'ouzm ket euz peleh ez eo.
30. An den a respont outo:
- An dra-mañ eo a zo souezuz,
n'oufeh ket euz peleh ez eo,
goude ma 'neus digoret din va daoulagad .
31. Gouzoud a reom: oll ne zelaou ket Doue ar beherien,
med kement hini a enor Doue hag a ra e volonte
a vez selaouet e bedenn.
32. Biskoaz n'eo bet klevet lavaret e-nefe unan bennag
digoret e zaoulagad d'eun dên ganet dall.
33. Ma ne vije ket hemañ a-berz Doue, n'hellje ket ober netra.
34. Respont a reont dezañ:
- Er pehejou out bet ganet penn-kil-ha-troad,
hag e kredez ober skol deom !
Hag e stlapont anezañ er-mêz.
35. Jezuz a zeu da glevet eo bet taolet er-mêz ganto;
pa gav anezañ, e lavar dezañ:
- Ha kredi a rez-te e Mab Doue ?
36. Hag egile da respont:
- Ha piou eo, Aotrou, ma kredin ennañ ?
37. Jezuz a lavar dezañ:
- E weloud a rez, eñ eo a gomz ouzit.
38. Egile dioustu a lavar:
- Kredi a ran, Aotrou !
Hag e stou d' e adori.
39. Jezuz a lavar neuze:
- Evid eur varnedigez on-me deut er bed-mañ:
evid ma teuo ar re na welont ket da gaoud ar gweled,
hag ar re a wel da veza dall.
40. Klevet eo e gomzou gant lod Farizianed a zo en-dro dezañ,

Hag e houlemmont outañ:

- Ha ni, daoust hag ez om dall ivez ?

41. Jezuz a respont:

- Ma vijeh dall, n'ho pijet ket a behed;

med pegwir e lavarit: Ni a wel sklêr, ho pehed a jom ennoh.

Evid al lennadur diverret: I, 6-9, 13-17, 34-38

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, dre ar Zalver, ho Mab, c'hwi 'ra ken kaer tra
ma 'z eo renta d'an dud ar peñh ganeoh-c'hwi;
grit, ni ho ped, ma poanio pobl ar gristenien,
gand feiz beo ha karantez birvidig,
d'enem brepari evid goueliou Pask, bremañ o tostaad.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh hag gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

A galon laouen, Aotrou Doue, e kinnigom deoh
Sakrifiñ ar Zilvidigez peurbaduz,
hag ho pedom d'or zikour
d'adori, gand feiz, ar Zakramant
ha da lida ervad an Overenn,
evid silvidigez ar bed.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

PREFAS

E gwirionez.....dre Jezuz Krist, Or Zalver.
Eñ e-neus digaset gouenn an dud, o kerzed, reuzeudig, en deñvalijenn,
da sklerijenn ar Feiz, en eur gemer natur mab-dén;
ha pa oant sklavourien d'ar pehed, o tond er bed, e-neus grêt anezo bugale deoh,
dre vertuz dour ar Vadiziant, mammenn ar Vuez Nevez.
Setu perag emañ ho krouadurien eus an Neñv hag euz an douar,
o kana eur hantik nevez, en eur stoui dirazoh, gand doujans;
ha ni ivez, gand an oñl êlez, a embann ho meuleudi,
en eur lavared da viken:

GOUDE AR KOMUNION

Aotrou Doue,
C'hwi hag a skuill sklêrded war gement dén a zeu er Bed,
plijet ganeoh sklerijenna or halonou, gand splannder ho kras,
ma vo bepred or zonzou mad da blijout deoh,
ha gwirion or harantez.
Dre Jezuz krist, Or Zalver.

LENNADENN GENTA: Doue a zo gouest da zigas buez en-dro er re varo.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL. 37/I2-14

I2. Eveinenn, e komz an Aotrou Doue:

- Setu e teuin da zigeri ho péziou
ha d'ho tenna euz ar bēz, evid digas ahanoh en-dro da vro-Israel.

I3. Gouzoud a reot ez on-me an Aotrou, pa zigorin ho péziou
hag ho tennin euz ar bēz.

I4. C'hweza 'rin va Spered ennoh, hag ho pezo buez;
ho lakad a rin da veva eüruz en ho pro.;
gouzoud a reot neuze ez on-me an Aotrou:
ar pez am eus lavaret, hen ober a rin. Setu Komz Doue.

SALM I29

I-2,3-4ab,4c-6,7-8

Diskan:

Doue zo eur mor a drugarez,
gand largentez, e ro ar zilvidigez.

1. Euz an toull don ha teñval, e hopan d'ho kervel, Aotrou Doue;
va Doue, selaouit va mouez.

2. Troit ho tiskouarn da gleved va fedenn virvidig.

3. Ma sellit piz ouz ar pehejou, Aotrou, piou a hello herzel ?

4. N'eo ket evelse, rag ganeoh e kaver ar pardon,
bez e heller ho servicha gand doujañs.

4c Va fizians a lakan en Aotrou Doue, fizians am eus e bromesa.

5-6 Fizioud a ran war an Aotrou, surah eged eur gedour-noz war houlou an deiz.

7. Surah eged ar gedour o hortoz goulou-deiz,
ra lako Israel e fizians en Aotrou Doue.

Rag an Aotrou 'zo eur mor a drugarez,
gand largentez e ro ar zilvidigez.

8. Eñ a saveteo Israel euz e oll behejou.

EIL LENNADENN: Ar memez Doue e-neus resusitet Jezuz a raio deom ivez beva en-dro.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM (8/8-II)

8. Va breudeur, an dud a vev, o heulia youlou fall an natur
n'hellont ket plijout da Zoue.

9. C'hwil avad, n'oh ket renet gand an natur fall, med gand ar spered,
pegwir emañ Spered Doue o veva ennoh.

Ar re n'o deus ket Spered an Aotrou Krist, n'emaint ket en e gerz.

10. Ma 'mañ eta an Aotrou Krist ennoh,
ar forv a zo sujet d'ar maro, abalamour d'ar pehed,
med ar spered a zo buez abalamour d'ar justis.

11. Ha ma vev ennoh ar Spered an hini e-neus savet Jezuz a douez ar re varo,
hennet hag e-neus savet Or Zalver Jezuz euz a varo da veo
a roio buez ivez d'ho korvou sujet d'ar maro,
dre ar Spered a zo o veva ennoh.

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, grit deom kompren gand pebez karantez evid ar bed,
eo eet ho Mab beteg gouzañv ar maro;
ha dre sikour ho kras, 13
grit deom beva a wir galon
er memez karantez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue Beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVON

Selaouit or pedennou, Doue Oll-halloudeg,
ha grit d'ho servicherien, sklerijennet ganeoh,
war ar feiz kristen,
beza gwalhet o ene dre vertuz ar Zakrifis-mañ.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

PREFAS

a/ hini ar Horaiz da zul (*gweled d'ar zul gentañ, p. 61*)
(~~Levr-Overenn Aotrou p. 44~~)

b/ ^{bet} ma ' z eo lennet aviel Lazar, ar prefas-mañ:

E gwirionez.....dre Jezuz Krist, Or Zalver.
Eñ hag a zo gwir d'én, e-neus skuillet d'élou war e vignon Lazar,
hag eñ, Doue Peurbadel,
e-neus grêt dezañ sevel beo euz ar béz;
eñ c'hoaz, leun a druez ouz gouenn an dud,
a zoug ahanom d'eur vuez nevez, dre e zakramañchou santel.
Drezañ oh adoret gand an oll êlez, laouen dirazoh da viken,
hag e fell deom unani or mouezioù evid ho meuli,
en eur lavared gand kén braz levenez:

GOUDE AR GOMUNION

Roit deom ar hras, ni ho ped, Doue Oll-halloudeg, 1 t Roit
da jom bepréd izili beo d'an Aotrou Krist,
a resevom e Gorv hag e Wad er Zakramant.
Drezañ, On Doue Beo
a oll viskoaz da virviken.

- na zalhi ket a gasoni ouz bugale da bobl.
19. Karout a ri da nesa evelldout da unan."
Me eo an Aotrou.

SALM IO2

I-2,8,10,12-13

Diskan:

Kanom bennoz da Zoue,va ene !
Kanom bennoz da Zoue !

(ton er Hantikou N°10)

1. Lavar bennoz da Zoue,va ene,
kement a zo em hreiz,bennoz d'e ano santel !
2. Ya,va ene,lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou.
3. Eñ an hini a bardon dit da oll behejou,
a bare ahanout euz peb kleñved;
4. Eñ an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,
a ra dit eur gurunenn gand e vadelez hag e drugarez.
8. Madelez ha trugarez eo an Aotrou Doue,
n'eo ket buan da vond en egar,med leun eo a vadelez.
10. N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver,
n'eo ket diouz an droug a reom e kastiz ahanom.
12. Keit ha m'emañ ar zav-heol euz ar huz-heol,
e kas pelli diouzm or pehejou.
13. Evel m'e-neus eun tad kalon dener ouz e vab,
evelse an Aotrou Doue evid an dud a zouj anezañ.

EIL LENNADENN :Peb tra a zo deoh,met c'hwi a zo d'ar Hrist,hag ar Hrist a zo da Zoue.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER GORINT.3/16-23

16. Va breudeur,c'hwi a oar mad ez oh templ Doue,
hag ema spered Doue o chom ennoh.
17. An hini a ziskar templ Doue,
a vo d'e dro d' karet gand Doue,
rag c'hwi eo an templ-se.
18. Arabad deoh fazia war gement-mañ:
ma'z eus unan bennag ahanoh hag a zonj dezañ beza fur-fur,
klevit ganen,hervez doare ar bed,
eo ret dezañ dond da veza foll evid gounid ar gwir furnez.
19. Rag furnez ar bed-mañ a zo follentez dirag Doue.

Ar Skritur Sakr a lavara:

20. - Tapout a rei an den fur, el lasou stignet gantañ e-unan;
hag ivez
- An Aotrou a anavez menosiou an dud fur;
gouzoud a ra n'int nemed avel ha moged.
21. N'ho peus ket eta da denna lorch euz an dud.
22. Med eoh eo peb tra:
Paol, Apollos, Per, ar bed, ar vuez, ar maro,
an amzer vremen, hag an amzer da zond;
med c'hwi a zo d'ar Hrist, hag ar Hrist a zo da Zoue.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

" N'eus fors piou, ma kar ahanon, a viro va homzou:
neuze va Zad e garo, dond a raim beteg ennan
hag on demeurans a raim ennañ."
Alleluia !

AVIEL HOR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 5/38-48

- Jezuz a lavar d'e ziskibien bodet en dro dezañ:
38. - Gouzoud a rit e veze lavaret: lagad evid lagad, dant evid dant.
39. Mad ! me 'lavar deoh: ne enebi ket ouz an den fallakr,
er hontrol, tro da jod kleiz ouz an hini a sko ganez war da jod deou.
40. Ma fell dezañ ober proses dit, evid kaoud da zae,
lez gantañ ivez da vantell.
41. Ma teu unan bennag da ober dit mond gantañ epad eun hanter-leo,
chom gantañ epad eul leo penn-da-benn.
42. Ro d'an neb a houlenn.
Ne dro ket kein d'an hini a houlen: diganez presta dezañ.
43. Klevet ho peus e veze lavaret: Karit ho nesa ha kasañ hoh enebour.
44. Med me lavar deoh: Karit hoh enebourien,
ha pedit evid ar re ho peus da houzanv ganto.
45. Evid beza evelse gwir vugale d'ho Tad a zo en Neñv,
eñ hag a ra d'e heol para war an dud fall koulz ha war ar re vad,
ha d'ar glao koueza war an dud 'zo santel koulz ha war ar re n'int ket
46. M'ho peus karantez evid ar re ho kar,
peseurt digoll a hellfech da hortoz ?
Daoust hag ar bublikaned o-unan ne reont ket kemend all ?
47. Ma ne zaludit nemed ho preudeur,
petra a zisheñvel a rit ?
Ar bañaned zoken a ra kemend all.
48. Ra vo peurvad ho madelez evel m'eo peurvad ho Tad a zo en Neñv.

PEDENN AN DIGOR

Grit, ni ho ped, Aotrou Doue,
ma vo or zonz bepred gand madou an ene,
ha ma ne raim morse nemed ar pezh a blij deoh,
dre gomz koulz ha dre ober.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

WAR PROVOU

Ho pedi a reom, a greiz or halon, Aotrou Doue,
 en eur lida an Overenn zantel, gand an aked a dleom:
 ar Zakrifis a ginnigom en enor d'ho kloar,
 grit ma vo talvouduz ivez d'or Zilvidigez.

GOUDE AR GOMUNION

Grit, ni ho ped, Doue OLL-halloudeg,
 ma hellim reseo, en e fêz, ar zilvidigez evuruz,
 oN eus bet an arrez (pe: an tañva) anezi, dre an overenn-mañ.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

LENNADENN GENTA : Bikenn ne zeuin d'hoh ankounac'haad.

LENNADENN EUZ LEOR AR PROFED EZAIAZ 49/14-15

14. Ker Zion a lavare:
 - Doue e-neus va dilezet,
 an Aotrou e-neus va ankounac'hêet
15. Daoust hag e hell eur vaouez ankounac'haad
 ar hrouadur ema o vaga
 ha chom heb karet ar mab he deus douget ?
 Ha goude ma teufe ar mammou da ankounac'haad,
 me avad, n'er grin ket.
 Komzou Doue Oll-halloudeg.

SALM 61

2-3,6-7,8-9ab

Diskan : E Doue hebken e kavan va diskuiz.

2. E Doue hebken, e kav va ene diskuiz;
 anezañ e teu din ar zilvidigez.
3. Eñ hebken eo va roh, va zilvidigez, va hastel;
 divrall e chomin.
6. Doue, ennan hebken e kavan va diskuiz,
 anezañ e teu din kement a esperan.
7. Eñ hebken eo va roh, va zilvidigez, va hastel;
 divrall e chomin.
8. Doue, ema ennañ va zilvidigez ha va gloar;
 va repu a zo e Doue.
- 9ab Poblou bezet fizianz ennañ;
 digorit dezañ ho kalon.

EIL LENNADENN : An Aotrou a roio da anaoud ar pezh a zo kuzet.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER GORINT. 4/1-5

1. Ni a dle beza kemeret gant an dud,
 evid servicherien an Aotrou Krist,
 karget euz misteriou Doue,
2. hogen petra hortozer diouz merourien, nemed beza feal en o harg ?
3. Evidon-me, ne ran ket nemeur a van evid beza barnet ganeoh,
 pe gand eul lez varn benag euz ar bed-mañ,
 ne gredan ket zoken en em varn va unan.
4. Rebech ebet ne ra din va houstians, gwir eo,
 n'eo ket awalh kement-se, evid din beza didamall,
 va barner eo an Aotrou.
5. Setu perag na varnit ket araog ar mare,
 ken na zeuy an Aotrou,
 eñ a lakay sklerijenn da bara war ar pezh a oa en denvalijenn
 ha da zizelei menosiou kuzet ar galon.
 Neuze e resevo peb hini digand Doue ar veuleudi dleet dezañ.

SALUD D'AN AVIEL

L Alleluia ! Alleluia !

"Va denved a anavez va mouez, eme Jezuz,

Me a anavez, hag int a deu d'am heul.

Alleluia ! Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST. HERVEZ SANT VAZE. 6/24-34

24. Jezuz a lavar d' ziskibien bodet en dro dezañ :
 - Den ne hell servicha daou vestr,
 pe e-no kasoni ouz unan ha karantez ouz egile,
 pe, e karo unan hag e tisprijo egile.
 N'hellit ket servicha Doue hag an arhant .
25. Setu perag e lavaran deoh :
 - Na vezit ket war enkrez gand ho puez,
 o klask gouzoud petra ho po da zebri ha penaoz e vezoh gwisket.
 Daoust hag ar vuez ne dalv ket hirroh eged ar boued
 hag ar horv hirroh eged an dillad ?
26. Sellit ouz al laboused a nij a zioh ho penn,
 n'ouzont hada na medi, na dastum er hrignoliou,
 koulskoude int maget gand ho Tad euz an Neñv.
 Daoust ha ne dalvezit ket kalz muioh egeto ?
27. Pehini ahanoh a hell dre e nerz e unan,
 astenn e vuez euz eun ilinad hebken ?
28. Ha perag beza nehet diwar benn ho tillad ?
 Sellit penaoz e kresk lilli ar maeziou,
 n'ouzont na labourad, na neza.
29. Ha me lavar deoh : " Ar Roue Salaün e-unan e kreiz e hloar
 n'eo ket gwisket ken kaer eged hini pe hini anezo.
30. Ma teu eta Doue da wiska ken kaer geotenn ar maeziou a zo beo hirio,
 hag e vo warhoaz taolet en tan,
 pegement muioh ne rey ket evidoh, tud laosk a feiz
31. Bezit eta dineh ha ne lavarit ket petra on devezo da zebri, petra da eva,
 gand petra e vezim gwisket.
32. An oll draou-ze ems ar bained war glask anezo.
33. Klaskit da genta rouantelez an Neñv hag e zantelez,
 hag an oll draou-ze a vo roet deoh war ar marhad.
34. Na vezit ket nehet gand an deiz a warhoaz,
 an deiz da zond a gemero preder gantañ e-unan .
 Peb dervez a zo awalc'h dezañ e lod a boan.

PEDENN AN DIGOR

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 ma reno ar peoh muioh-mui, dre ar bed, hervez ho polontez,
 ha ma kavo ho pugale levenez ouz ho servija, heb enkrez.
 Dre O Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh hag gand ar Spered Glan,
 e oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, diganeoh eo e teu deom ar pezh a ginnigom deoh:
ha koulskoude evidoh ar brovadenn a zeu euz or harantez:
ho pedi a reom eta gand fizians,
peogwir n'on-eus ken talvoudegez nemed dre ho tonezonou deoh,
ra daolint frouez ennom,
evid al levenez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

GOUDE AR GOMUNION

Maget ganeoh, Aotrou Doue,
dre ar perzh on-eus kemeret er Mister a zilvidigez,
ni ho ped c'hoaz, dre ar Zakramant a ra on nerz hirio,
grit ma vevim ganeoh da viken. Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

Nevez deuet er meaz: BREIZ A GAN N° 5

KANTIKOU HA SALMOU NEVEZ, kentoniet gand R.Abjean.

El levr-ze, e vez kavet:

- N°1: Kaer ha plijus meurbet
 2. Meulit oll, meulit Doue
 2. Warzu ennoh e savan va ene
 4. Doue eo va Fastor

EVID NEDELEG

5. Warzu ennoh'savan va halon
 6. Eur vouez a zav euz barr an neñv
 7. Messi, deuit heb dale
 8. Kamom! Ganet eo Salver ar Bed
 9. Kanom Nouel!
 10. Or Zalver, 'vid or prena

EVID AN ANAON

18. Ganeoh om renet
 19. An Aotrou Doue eo va repu
 21. Beva en ho palez

OVERENN AN ANAON

22. D'an Anaon, roit Doue
 23. Gradual: Salver Jezuz
 24. In paradisum: d'ar baradoz
 25. D'an Anaon
 26. Pedenn

EVID PASK

12. Euz ar bez, beo oun savet
 13. Karantez vras an Aotrou Doue
 14. Alleluia! lammmet eo kuit ar mean
 15. Da Jezuz, Oan Pask kinniget
 16. Kanom, oll ! Alleluia !
 17. Setu an deiz braz.

EVID AR GOMUNION

27. Deut! va Doue!
 28. Jezuz a oll-viskoaz
 29. Jezuz, pegen braz ve

OVERENN SANTEZ ANNA

30. Digor: D'Or Mamm Santez Anna
 31. Araog kuitaad: Itron Santez Anna
 32. Santez Anna, patronez vad
 33. Ni'gred en eun Doue hebken
 34. Oan Doue

Ouspenn al leor-ze hag a goust 5 lur,
 e kavoh eur bladenn nevez: OVERENN SANTEZ ANNA, e ABATI AR RELEC.
 O goulenn digand: -----

Roje Abjean, presbytère Saint-Matthieu - 29 N - MORLAIX

PAQUES

- Pask -



- CHANT D'ENTREE -

A. Seznec.

Refr.- Sa - vet oun eus ar ma - ro. Se - tu me a - dar - re beo. Ganeoh e cho -

min e - ta, E - vit a - to ! Al - le - lu - ia !

1- O va Ao - trou war ho p
2- A-naout a rit mat ho pu
3- Meuleu - di, bennoz da Zou.


1- gel, 'Peus as-ten -net ho tourn san-tel: Rak ho fur - nez a oar a-vat, Ar
2- gel: En gwal- ga-set 'peus a - li - es. Ho -gen, bep tro, gant ho skoazel, eo
3- e : D'an Tad krou -er, d'ar Mab Sal- ver, D'ar Spe - ret glan skle-ri-jen-ner, bre
(man hag en eternite !)

1- pez 'vi-tan zo de - re - at.
2- bet sa-vet leun a vu - hez.


- CHANT D'OFFERTOIRE -

Ref- Al - le - lu - ia ! Meu - leu - di d'an Ao - trou, War an - douar hag e -


bolz an nen-vou ! Gal-lou - dus eo ha Mestr - bras war ar bed ! Gloar hag



he - nor ra vo - d'e - zan dou - get ! 1- Ka - nit 'ta, hwi e zer-vi-che-
2- Dreist an nenv ha dreist ar bed ^{krou-}




1- rien, Ka - nit 'ta ha - no bras hon Ao - trou ! Ka - nit 'ta hwi holl groua-
2- et E ma gl'ear hag he-nor hon Dou - e ! Ka - nomp holl ha ka-nom holl



1- du - rien, Rak 'vi - doc'h en 'deus - gret bur - zu - dou !
2- Be-pred: Tru - ga - rez ha ben - noz d'hor Rou - e !

~ Kan - digor erid Lask ~

euz ar bez. A. Suznec.



Euz ar bez, beo on sa - vet ha ga-neoh e cho-min be-pred, Al-le-lu-ia.

1- Astennet' peus gand ma - de - lez ho torn warnon-me, ken dister.
2- Skoet oun bet gand ar hla - har a-na - vezout'rit ho pugel
3- Meuleudi ben - noz da Zou - e d'an Tad kreuer d'ar Mab Salver

1- ha ken bur - zudus ho fur - nez, ma z'on mantret gand he skler-der!
2- ken'li - ez en war an dis - kar on bet sa - vet gand he sk - a - zell!
3- d'ar Spered Glan skleri-jenner bre - man hag en e - ter - ni - té !

An heol o sevel —

Ton Kembraeg: "Llanfair"

Komzou: Lob Seite

1 Sell ouz an heol o se-vel, Al - - le-lu-ia

2 Ma dre-ger no an dou-ar, Al - - le-lu-ia

3 Pe-gwir eo goul-ig an bez

1 Kae-roh e sked an dremm-wel, Al - - le-lu-ia

2 Di-rag e hal-loud dis-par, Al - - le-lu-ia

3 E-man ga-neom a na-vez

1 Ar bed hi-rio zo-war-hed, Al - - le-lu-ia

2 Maer-der ha lufr ar-ste-red, Al - - le-lu-ia

3 Ka-nqn oll on le-ve-nez

1 Gand mall neu-li Mestr ar-bed, Al - - le-lu-ia

2 N'int ne-tra e kerz e-sked, Al - - le-lu-ia

3 D'or Zal-ver deut er bu-hez

— Kevreiz Doue ti Kael - 2-10-70

Savet da veo!

Choral Gallois-

Paroles: André Marc

"Rwy'n canu fel cana'r aderyn"

1 La - ouen bun e-vel an al-houeder, En despet d'an oll trubuilhou;
 2 C'hoarzin a ran' vel ar ste-re-denn A sked dindan bolz an nenvou;
 3 Me zo vel eul li-li-enn de ner: Je-zuz an zi-wall diouz ar reo,

1 La - ouen oun e-vel an al-houeder, En despet d'an oll trubuilhou;

1 Va - ha-lon jon eü-rus ha - se-der Rak Jezuz 'zo sa-vet da veo.
 2 Se - tu' po-rag ez oun Ken-la-ouen: Sa-vet eo a-dar-re da - veo.
 Diouz an a-vel hadiouz ar gwallan-zor: Sa-vet eo a-dar-re da - veo.

1 Va - ha-lon jon eü-rus ha - se-der Rak Jezuz 'zo sa-vet da - veo.

Rak Je-zuz zo sa-vet da veo, Rak Je-zuz zo sa-vet da veo,
 Rak Je-zuz zo sa-vet da veo, Rak Je-zuz zo sa-vet da veo,

Da - vi-ken me - ve-vo, rak Je-zuz zo sa-vet a-dar-re da veo.
 Da - vi-ken me - ve-vo, rak Je-zuz zo sa-vet a-dar-re da veo!

— Kenvroiz Dom Mikael - 2-10-70